

# UN AVENIR POUR NOTRE LANGUE !

## OUI au breton dans la vie publique !

### Quelle place pour le breton à Vannes ?

Il ne reste aujourd'hui que 200 000 personnes parlant breton, quand on en dénombrait encore 1 million vers 1950 à l'ouest de la Bretagne. C'est pourquoi l'UNESCO classe le breton parmi les langues sérieusement en danger. S'il est vrai qu'au cours du siècle dernier, le breton n'avait sa place ni à l'école, ni dans les médias, ni dans la vie publique, cette politique du monolinguisme exclusif est aujourd'hui révolue. A contrario, la diversité culturelle est de plus en plus mise en avant, ainsi que les bienfaits du bilinguisme, voire du plurilinguisme, dans la construction des individus.

A l'heure de la mondialisation, les Bretons sont fiers de leur identité et souhaitent que leur langue reste vivante et soit transmise aux générations futures. De nombreuses initiatives sont prises, localement ou à plus grande échelle : création de filières d'enseignement bilingue ou immersive, publication d'ouvrage en breton pour enfants et pour adultes, développement de loisirs en langue bretonne... Si ces actions, souvent bénévoles, sont tout à fait bénéfiques, elles ne peuvent cependant répondre à tous les besoins ni à toutes les demandes.

Le rôle des collectivités locales est donc primordial pour amplifier rapidement cette dynamique et relever ensemble le **défi de la réappropriation de cette part de notre patrimoine commun, et permettre le développement d'une langue bretonne vivante, créative, favorisant l'économie et le lien social. Les élus locaux ont donc une responsabilité essentielle en la matière.**

En septembre 2007, la ville a obtenu le premier niveau de la charte «**Ya d'ar brezhoneg**» (*Oui à la langue bretonne*) et s'est engagé pour atteindre le niveau 2 (non atteint à ce jour) de cette charte (comptant 4 niveaux). Depuis environ 2 ans, nous constatons des **reculs pour la langue** (*signalétique routière redevenant monolingue par endroits, non intégration de la langue bretonne dans la signalétique patrimoniale ou des bâtiments publics lors de rénovations, disparition de celle-ci dans les événements publics...*).

Nous avons rencontré le Maire de Vannes en février 2014, remis un dossier avec des propositions, rencontré également le conseiller municipal délégué à la langue bretonne, écrit de nouveau une lettre. Rien n'y fait! **L'inauguration d'une médiathèque ignorant totalement la langue bretonne dans un quartier avec plus de 250 élèves scolarisés en filière bilingue (écoles Française d'Amboise, Saint-Gwenn et collège Notre Dame le Ménimur) est un véritable déni des engagements de la ville de Vannes !** Nous appelons les élus de la ville de Vannes à se ressaisir et à **mettre en place les outils permettant de donner une place réelle (et non folklorique) dans l'espace public** : nomination d'un technicien en charge du breton (comme auparavant), mise en place d'une charte interne d'utilisation de la langue bretonne dans les services de la ville de Vannes, mise en place d'un comité suivi pour la langue bretonne avec les associations locales, évaluation annuelle de la politique de la ville en matière linguistique et actions de formation interne à la langue bretonne pour le personnel sur la base du volontariat.



# UN DAZONT EVIT HOR YEZH !

YA d'ar brezhoneg er vuhez foran !

## Peseurt plas evit ar brezhoneg e Gwened ?

Hiziv an deiz ne chom nemet 200 00 den ouia brezhoneg pa oa 1 million c'hoazh tro 1950. En arvar bras emañ ar yezh hrevez an UNESCO ! **Koulskoude e pep lec'h e Breizh e ra milliadoù a dud o seizh gwellañ evit ma vev hor yezh, evit ma vo kaset a rumm da rumm.**

Ar Vretoned, e-kreiz ar bedeladur a-vremañ, a zo lorc'h enno get o identelezh, ha fellout a ra dezho derc'hel bev o yezh ha kas anezhi d'ar rummadoù tud da zont. Evit an dra-se e weler oberezhioù a-bep seurt kaset da benn, àr tachennoù bras pe brasoc'h : krouet e vez hentennoù deskiñ en div yezh pe dre soubidigezh, embannet e vez levrioù brezhoneg evit ar vugale pe an dud deuet, diorret e vez an dudi e brezhoneg... Mat-tre eo an holl draoù-se kaset da benn get tud a youl vat peurliesañ, met n'eo ket a-wac'h evit bastañ an holl ez-hommoù na respont d'an holl c'houlennoù.

**A-bouez-ruz eo perzh ar strollegezhioù lec'hel evit kreñvaat buan al luskad-se ha stourm asambles evit adperc'hennañ al lodenn voutin-mañ eus hor glad**, ha diorren ar brezhoneg èl ur yezh vev, frouezhus, mat evit an ekonomiezh hag a sikour da grouiñ liammoù etre an dud. N'eus ket tostoc'h doc'h ar sitoianed evit ar c'humunioù hag ar c'humuniezhioù-kumunioù : gete e vez frammet hor buhez pemdeziek. Pouezus-kenañ eo an dilennidi lec'hel evit kas ra brezhoneg àr-raok.

**E Miz Gwenholo 2007 eo bet tapet 1añ live karta " Ya d'ar Brezhoneg" get kêr Gwened hag engouestlet he deus da dapout al live 2, e touez ar 4 live a zo en holl, met n'eo ket bet graet c'hoazh.** Abaoe 2 vlezad e welomp ez a àr gil ar yezh zoken: panellerezh hent unyezhek e lec'hioù 'zo, panneloù glad ha àr savadurioù foran divrezhoneg goude labourioù 'zo, brezhoneg ebet e-pad darvoudoù publik...

En em gavet hon doa get Maer Gwened e miz C'hwevrer 2014, reit dezhañ un teuliad get kinnigoù, eskemmet gant ar c'huzulier kêr e-karg ag ar Brezhoneg, skrivet ur wezh adarre ul lizher d'ar maer. Met netra ne 'z a war-raok. Lid-digeriñ ur vediaoueg nevez divrezhoneg en ur c'harter el lec'h ma gonter 250 bugel en hentadoù divyezhek (*skolioù Fransez Ambon, Sant-Gwenn ha skolaj Menemeur*) a zo gober goap da vat ag an engouestloù bet kemeret gant ti-kêr Gwened. **Gervel a reomp dilennidi kêr Gwened da zihuniñ ha da lakaat e-plas an ostilhoù a roio ur gwir plas d'ar Brezhoneg er vuhez foran (ha ket unan fol-klorel):** anvadur ur gwazour ag an ti-kêr e-karg eus ar Brezhoneg (e-giz ma oa gwezharall), lakaat e-plas ur garta diabarzh e-keñver implij ar Brezhoneg e servijoù an ti-kêr, lakaat e-plas ur poellgor get kevredigezhioù lec'hel evit heuliañ an doare ma 'z a àr raok ar Brezhoneg, priziañ bep bloaz politikerezh yezh an ti-kêr ha sevel oberennoù evit stummañ an implijidi d'ar Brezhoneg evit ar re o deus c'hoant.

